



Noeñ kizellet get. a. PERLIN

GANNEDIGEH HOR SALVER

BALÉADEN NÉDELEG

GET

MAB ER HLOHÉR



MOLLADENNEU

" DIHUNAMB "

HENBONT

1938



Baléaden Nédeleg

Diskan, *Ar er gear*

Jé - zuz Kroédur O me Salvér Che-leu-et boéh er la -
 bourér Reit demb hi - ziu Reit demb ber - pet er
 san - fe - leh en eu - rus - ted.

Poz

M'hoh a - dor o Jé - zuz guir Doué en
 des vennet a - veit salvein er bed dis - ken - nein
 ag en Néan Eit do - net de vout dén Ha
 ne hues ket dou - jet ku - het hou na - tur Doué.
 é korv ur Uer - héz glan.

D'en abad M. Robert,
diakr é Kloérdi Guéned.
(Genvér 1933)

<i>En noz tioél en des gronnet</i>	<i>Edan en Néan, safar erbet</i>
<i>Koèdeu ihuél er mañnéieu;</i>	<i>Ne dor hénoah peah er mézeu :</i>
<i>Hé mantel du zo astennet</i>	<i>Jézuz, hon Doué, e zo gañnet</i>
<i>Ar bradeu glas er flagenneu</i>	<i>Ér beuranté, ar blouz ur hreu.</i>

DISKAN

*Jézuz-Kroèdur, o me Salvér,
Cheleuet boéh el labourér :
Reit demb hiziù, reit demb berpet
Er santeleh, en eurved.*

ER LABOURIZION-DOAR D'ER GROH

*Én dro d'hou kavelig, chetu tud ag en doar,
Tud kriù ha tud kalet, a gorr hag a spered,
Met staget doh ou Fé ha fidél d'ou lavar.
Ar hent er Baradouiz, konduiet ind berpet.*

PEDEN EL LABOURÉR

*M'hus ador, o Jézuz, guir Doué en des vennet
Aveit salvein er bed, diskennein ag en Néan
Eit donet de vout dén; ha ne hues ket doujet
Kuhet hou natur Doué é korv er Uerhéz glan.*

*Get en Eled, er Sent, ha get er Santézed,
Get er Speredeu-glan, get ol en treu kroéet,
Me gan hou karanté, me gan hou roanteleh,
Hou mestroni arnomb hag ar er bed abéh.*

*Trugéré deoh, men Doué, trugéré e laran
Eit el loér, er stired e luh é lein en néan,
Aveit tuemdér en héol e laka de vleuein
Er gué d'en neùé-hañù, en had de gelidein,*

*Aveit kan en éned, aveit trouz er mor bras,
Eit soñnen en àùél é bareu er gué glas,
Eit bleu-brug Breih-Izél, eit benal el lanneu,
Trugéré, o men Doué, ag hou tonézoueu.*

Eit gounid er bara, el labourér, bamdé,
E huiz é troeïn en doar, é tivareïn er gué,
É hadeïn, é huennat; met ne hello esteïn,
Hep hou sekour, men Doué, 'meit kerteri ha poén.

Er glaù, tuemdér en héol, en aùél, en harnán
E zo hou sujité hag er ré sentusan :
Hou kelloud zo hep som, hou madeleh hep par;
Stréuet ind, o men Doué, revé dobér en doar.

Eit ma vleuo er gué, ma hlasei er pradeu,
Mah aleuro en héol en tuéxad ér parkeu,
Édan en avalen ma plégo er bareu,
Hag édan sam er gran, trestiéer er sulérieu.

Ma kreskei, é pep ti, ur vanden bugalé,
Ma vleuo én ou mesk boket er Garanté...
Reit demb eùé, Jézuз, éraok hou Paradouiz,
Bara eit taol en ti, hag eit Taol en Iliz.

Saùet, ton ha konzeu, get MAB ER HLOHÉR

Mat de vout mollet :

En 21 a viz Kalan-Gouïan 1938

CH. LE BARON

Vikél-bras



Ténnét a Zihunamb, dastumaden bretonek, Henbont (Morb.)

Mollereh « Dihunamb »; Le Bayon-Roger

13, tachen Alsace-Lorraine, én Oriant